

Kantik da Zant Vaudez

Patron Iliz parrez Henvic 8N2-1-026.

XI

Sant Vaudez, roñt adarre
Da gement zo klanv ar pare;
Ra vo guelec e'hoaz peb Breizad
O vale eñn-var an hent mad.

XII

C'hui a garie hon tadou-koz,
Roñt d'eomp ive ho pennoz;
Ni vezo d'eoc'h fidel d'hon tro,
Hag a greiz kalon ho karo.

XIII

Ho relegou d'eomp digaset
A lakañ doun en hor spered
Ar zonz euz ar vuez santel
O peuz reñet e Breiz-Izel.

XIV

Pa zaoulinit en hoc'h iliz,
Roñt skoazel d'hoc'h Henvigiz,
Da dud ar mēz, d'o douarou,
D'an dud a vor ha d'o bagou.

XV


Ha bep kristen a lavaro,
En ho parrez ha tro-var-dro:
En Env Sant Vaudez evuruz,
Var an doñar zo gallouduz.

Permis d'imprimer,

QUIMPER, 24 AVRIL 1900.

F. CORRIGOU, vic. gén.

Imp. rue du Château, 4. — Brest.



*Ann imach'na a zo tennet divar ann hini a zo enn iliz Lanmodez,
er C'hôtes-du-Nord, el leac'h m'en deuz bevet Sant-Maudez.*

Var don Kantik Sant Paol :

Kanomp, Kanomp a greiz kalon.

DISKAN

Aotrou Sant Vaudez, hor Patron,
Dalc'hit ar feiz en hor c'halon,
Feiz birvidik hon tadou koz,
Ma z'aimp gant-o d'ar baradoz.

I

Ho tad, ho mam, tud a feiz krenv,
A ziskoueze deoc'h hent an Env;
En ho falez, c'hoaz bihanik,
C'hui oa santel 'vel eun aelik.

II

Euruz ar bugel savet mad
Var barlen e vam hag e dad;
Hag euruz ar gerent, d'o zro:
Ho mab a rai enor d'ez-o.

III

D'ar skol e kasont o bugel
Gant mistri gweziek ha santel;
Ha Maudez, gant Doue galvet,
A lavar kenavo d'ar bed.

IV

Euz Iverzon, brema me 'vel
Eur vag, he gouel frank en avel,
O lamet var goummou ar mor,
Hag o touara en Arvor.

V

Roudou ho treid 'zo var an trez,
Rak ho pagik eo, Sant Vaudez,
Digaset oc'h d'eomp gant Doue,
'Vit e c'hloar ha mad hon ene.

VI

E douar Breiz c'hui 'peuz hadet
Feiz krenv hag a zo diwanet.
Hag eost mad en deuz bet Doue
Da zougen da c'hriagnol an Ee.

VII

C'hui a zo karet en hor bro,
Dister ar vouez a lavaro
Nerz dispar ho prezegennou
Ha niver braz ho purzudou.

VIII

Hoc'h enezen n'e doa guechall
'Met amprefaned ha dour sall;
Dour douz e deuz dre ho peden,
Hag amprefaned n'e deuz ken.

IX

An dud klanv, an dud mac'hagnet
Dreizoc'h o d'eze ar iec'hed;
An drouk-spered pell a dec'he,
Hag an dud dall sklear a vele.

X

En hon touez ma z'euz, siouaz!
Tud gwall-lakeet e peb giz c'hoaz,
Gant ar gaou tud keiz touellet,
Gant an drouk-spered tud dallet.